



Photo J. SAVINA

Miz Mae eo miz er Werhez, med ive miz Sant Erwan paeron Breiz.
Aman e weler relegou Sant Erwan douget e prosesion e pardon braz Landreger
d'an 19 a viz Mae.

BLEUN-BRUG

Niv. 99 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

MAE 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Da gaoud piou mond ? gand L. B.....	1
Dir-na-Dor, den a Feiz, breton reiz, gand Y. Brochen.....	2
Eun nozvez Nedeleg, gand Dir-na-Dor.....	4
Ene kaer Erwan ar Moal, gand Henri Poisson.....	8
Barzonegou, gand Saig ar Gov.....	10
An television oh erruoud er vro, gand J. Tricoire.....	12
Eur wall-droidad pesketêrêz, gand Job Seite	16
Daou hant e oam, gand Fanch Kerne	18
Istor ar Bleun-Brug, gand L. Lok	20
Tefizor ar Brezoneg beo, gand V. Favé	22
Keleier	24

DEVEZ AR BREZONEG

Abaoue 1952 e vez greet, beb bloaz, e strêdou or pemp departamant, eur gest evit skoazella ar brezoneg en oll skoliou ar vro.

Ar bloaz-mañ e vo greet d'ar Yaou-Bask, 30 a viz Mae : spilhennou a vo gwerzet.

Er Huzul-meur a zo bet savet evid ober war-dro an Devez-se, e kaver eun niver braz a dud a beb stad (pennou-braz ar politik, an Iliz, an Armé, an Deskadurez) a vo embannet dizale ar roll anezo.

Renet e vo ar Huzul-ze gant an Aotrou Andre LE TROCQUER, Prezidant an « Assemblée Nationale », depute ar Seine.

133848

da gaoud piou mond ?



Tremenet eo, eur wech muioh, ar goañv hir, ar goañv troidelluz ! Den ebed, e hellom beza dizoursi, n'eo kerse dezañ.

Emaom war dreuzou an hañv. Miz Mae, ar miz heb par on-eus ken al'iez huanadet war-du ennañ, a zo oh en em zispaka : « Bannou aour war e dal, bleuniou nevez war e zê, setu miz Mae ! »

Ha gand miz Mae, miz ar bleuniou, miz Rouanez an neñvou, e tigor ive or pardonioù. Ar pardonioù-ze, hag evid chom en o ster, a dlefe beza, evid an eneou, ar pezh ma 'z eo an nevez-amzer evid an douarou : deizioù a levenez yah a vuhez kaerroh.

Adaleg vremañ, an eil goude egile, ilizou ha chapelioù koz or bro o-devezo o dervez braz, o dervez gouel : gouel ar feiz, a ray gwrizioù dounnoh en eneou, gouel ar garantez, a dostaio kañonou ar gerent, ar vignoned, ha tud ar memes parrezioù...

Med e-touez ar pardonioù a jacho, heb mar ebed, an niverusa pardonerien, ema pardonioù ilizou ha chapelioù an Itron Varia.

Kalz traou a zo chañchet, en or horn-bro, gand ar brezelioù. Gizioù koz ha gizioù santel a zo kouezet, ha lezet a-gostez, ar feiz kristen a zo laoskeet er familhou. Eun dra, da vihanna, a jom beo buhezeg hoaz en on touez : bez ez eo an devosion d'ar Werhez.

War ar poent-se, n'eo ket hoaz re zisheñvel ar Vretoned a vremañ diouz re an amzer gwechall.

Ataô e teu kalon ar Breizad da domma pa gomz pe pa glev komz euz e Vamm euz an Neñv.

Kared a reer ataô darempredi al 'ehioù santel a zo bet darempredet gand ar re goz. Karet a reer ataô daoulina ha pedi en ilizou ha chapelioù m'int bet daoulinet, ha m'o-deus pedet enno.

Pa vezer gwasket gand ar boan hag an enkreiz, ne zeller, ha ne varhater ket gand skuizder ha gand dispign evid kaoud konfort ha frealzidigez.

Ar bed a hirio, hag a bromete deom kement a amzerioù eüruz, a zo eet eneb d'e her.

Ar bed a hirio, evel ar bed deh, a jom ataô eun dachenn a vrezel, eun draonienn a zaelou : « Tefival eo ar goabrenn, a beb tu arne ». Kaer e-neus an den ijina traou nevez hag astenn park e zeskadurez, e chom ataô berr : eur paour kêz den !

En despet d'ar pezh a zoñj hag ar pezh a lavar lod, an den, greet evid Doue, e-neus ezomm a Zaue. Ken al'iez gwech ma fell dezañ en em zevel ha bale gand e furnez e-unan, e teh diwar an hent mad hag e chach ar harr war e gein.

Ha n'her gwelom ket hirio sklêrroh eged biskoaz ?

En oll boanioù a gorr, a spered, hag a ene, a stourm ouzom, da gaoud piou ez aïm nemed daved an Hini a zo, war eun dro, mamm Doue ha mamm an dud ?

An testenioù splann euz he galloud hag he madelez, a-dreuz ar hantvejoù, a zo skrivet e lizerennou aour, koulz lavared, e peb-pajenn euz istor an Iliz.

« N'eus biskoaz k'evet e ve bet dilezet nikun euz ar re o-deus klas-ket he sikour hag en em erbedet outi... »

Eur bugel e-neus en e vamm eur fiziañs ha ne hell ket beza trehet. Hag eur vamm a zo bepred tener he kalon, zoken evid he hrouadur dizuj ha direiz...

Doùe a fell dezañ evid gloar E Vamm e tremenfe dre he daouarn kement gras a ro d'an dud. Honnez eo kredenn an Iliz, a zesk deom pedi an Itron Varia, ouz heñ envel yhed ar re glañv, sikour ar Gristenien, repu ar beherien, mamm ar hras.

Da gaoud piou mond? Deom da gaoud an Hini a zo hag a vezo or buhez, on dudi hag or fiziañs.

L. B.



DIR-na-DOR

den a feiz, BRETON REIZ

Setu ar brezegenn a reas an Ao. Brochen, da gefiver interramant an Ao. Erwan ar Moal (Dir-na-Dor).

Ma breudeur ker,

An Aotrou Moal n'ema ken en on touez : eet eo d'ober e beoh gand Doue. Tremenet eo war an douar evel eur sklêrijenn skeduz ha madelezuz ; tremenet eo war dachenn ar brezoneg, greet gantañ e roudenn, na vo ket dispennet gand ar re o-deus kemeret ar benveg war e lerh.

Eun den a feiz.

An Aotrou Moal a oe, d'agenta ha dreist-oll, eun den a feiz : evitañ « ar Brezoneg hag ar Feiz a oa breur ha c'hoar e Breiz ». Bet eo fidel, e-pad e vuhez, d'ar menoz-se, ha piou a hallfe henn tamall dezañ ? An Aotrou Moal a zo bet a-viskoaz eur spered lemm ha lugernuz, ha biskoaz goabrenn ar fals-kredennou n'he-deus astennet he golo war hent e feiz. E-pad hanter-kant vloaz, da nebeuta, e-neus dalhet banniel ar brezoneg etre e zaouarn, a-wel d'an oll, ha memez d'e enebourien. Ha koulskoude, sur mad, ne oa den ebed, en tu all dezañ, o kared ar peoh. Soñjal a ree e tlefem beva evel an tri 'ferson euz an Dreinded Santel, on skouer hag on nerz, e tlefem klask arruoud da gared an oll.

Mar e-nije asantet an oll gand reolenn meur e vuhez — Doue da genta, ha Breiz da houde — o-dije gallet oll ober gantañ eur peoh gwirion. Ar menoz-se a oa gwelloc'h hini ar re goz oll. Pa oan bihan, em-eus soñj em-oa eun amezegez hag a ree e-pad ar zizun marhajoù ha foarioù ar vro. Pa he-deveze staget heh anevañ war he gwetur, a-raog mond e roud, e ree sin ar groaz hag e lavare : « Doue a-raog ». Ahanta, an Ao. Moal, e kement tra e-neus greet war dachenn ar brezoneg, a zo bet heñvel ouz honnez : « Doue a-raog, ha ni war-lerh ».

Eur Breton reiz.

Kement-se n'e-neus ket harzet an Ao. Moal da veza eur Breton penn-kil-ha-troad. Rentet e-neus d'on yez karet, ar Brezoneg, eur zervij dreist par. Gand kalz a bersoned hag a ouie ar brezoneg, evel p'o-dije evet ar yez gand lêz o mammoù, an Ao. Moal a droas a-grenn e ijin trezeg Breiz-Izel, evid sevel en dro dezi eur gurunenn a hloar, a vrazoni hag a vraventez. Sevel a reas etre bugale an Eskopti he ebini da weled piou a deuje ar maout gantañ war e-leiz a vugale er honkourioù. Dre-oll e hadas ar garantez-vro ; hag ar hreunenn vad-se a zo bet diwanet abaoe e meur a galon ha douget frouez kaer.

Heb dale e kavas mignoned da rei dezañ skoazell : ne gomzin nemed euz unan hebken, euz an Ao. Yann-Vari Perrot, kure da genta e Plougerne ha, da echui, person e Skrignag. An den a galon-mañ, ar Breizad têt-mañ, a zavas ar Bleun-Brug, anavezet dre-oll. Peb rann-vro he-devoa he strollad : en Treger, Goelo, Kerne, e oa savet unan. Eno em-eus bet anavezet ar muia an Ao. Moal. Mond a reem gand on hent dorn-ouzdorn, ha na glizenn na gwabrenn ne zo bet savet biskoaz etrezom. Mond a reem d'ar gouelioù, da ouelioù ar Bleun-Brug, gand eun dudi dreist muzul : eno e tleem kaoud an diazeour — an Aotrou Perrot — hag e-leiz a vignoned all, leun a hred evid o Bro. Pebez levenez e-touez Bretoned gand ar gouelioù-ze ! Ne gav ket deoh, ma Breudeur ker, e oam dija war hent ar Baradoz ?

An Aotrou Moal e-noa eur bluenn lemm ha founnuz : e-pad hanter-kant vloaz e-neus, koulz lavared heb ehan, stlabeet (strewet) ar vro gand e oberou, kanqouennou, kazetennoù, rimadelloù, peziou-c'hoari, kontadennoù (piou n'anave ket « **Pipi Gonto** » ?), ha dreist-oll « **Buhez ar Zent** » lakaet e yez Treger diwar an hini savet gand an Ao. Perrot. An daou zen-ze — an Ao. Moal hag an Ao. Perrot — a oa mignoned ha mignoned vraz. E gouelioù ar Bleun-Brug e kemerent eur gambr hebken evito o-daou. An deiz war-lerh, ar beure, ne veze ket bet dispennet ar gweleou, chomet e vezent e-pad an noz, heb kavoud hir an amzer, da zivizoud diwar o Mamm-Bro. En em glevoud a reent evel daou viz ar memez dorn.

O ! soñjal a ran ez eo bet digemeret an Ao. Moal gand e vignon an Ao. Perrot, war dreuzou ar bed all. An Ao. Moal e-neus kavet war dreuzou ar Baradoz an Ao. Perrot, beuzet en e wad evid kdrantez e vro, hag oll zent Breiz-Izel evid e zigemer. Hag eñ n'e-nevoa ket karet ha kanet anezo o'l amañ war an douar ?

O Sant Iltud, ho-pet truez ouz ho servijer leal, ouz ho parrezian karantezuz ha doujuz, ha grêt ma tigouezo heb dale, mar n'ema ker c'hoaz, e-kreiz êlez ar Baradoz da gana meuleudi Doue, e-pad an eternite.

Evelse bezet greet.

Y. BROCHEN,

Vikel vraz Eskobti Sant Brieg ha Landreger.



Eun nozvez Nedeleg

Er blavez 1792, ma zud vad, e oe grêt nozvez Nedeleg en eul lochenn boutaouer-koad en Traonienn-an-Eostig, damdost d'ar gêriadenn e-leh ma 'z on ganet.

An aotrou person a oa tri miz a oa o vond euz an eil leur d'eben hag euz an eil ti d'egile, peb hini war evez en dro dezañ er barrouz, gand aon na vije diskuilhet da baotred ar « Gonvansion », konsorted Robespierre.

An iliz a oa serret, ar prespitor ive, ha ne gleved ken, na sul na pemde, anjelus na kloherenn ebéd.

Ar zûnvez-se, e oe kaset ar helou dre ar barrouz penaoz ar person, hag a oa kuzet en Lanneg-an-Eostig, en eur wrahiell lann, a larje overenn hanternoz en lochenn eur boutaouer a oa deut da jom, nevez a oa, war-hed-taol d'al lanneg-se.

A-benn hanternoz eta e oa dastumet en ti ar boutaouer eun nebeudig tud, eun ugent bennag : al loj ne oa ket braz.

An aotrou person a oa gwisket evel eul laras e overenn, Ar halir, ar groaz, ar bara, ar gwin a oa kuzet dindan mên an oaled, eur pez mên a boueze n'oun ped kant : ahaue e oent tennet hag eno e vijent lakêt adarre.

Euz ar baotred, unan a veze bepred er-mêz o hedat, gand aon na digouezje eur reuz fall bennag warnom heb goud doare dim. Mes an traou a dremenas mad sur. An oll a gomunias en overenn ha me he respontas. Pa oe achu, an aotrou a reas eur zarmon dim, kaerra hini am-eus klevet em buhez.

E oam oll sioul o selaou ar person o komz dim euz ar Baradoz, euz a boaniou On Zalver war an douar, euz s ad ar relijion en or bro, euz kounnar an diaoul oh enebi bepred ouz Doue. Ne ouiem ket a geleier euz ar mêz, nemed e oad o klask laza an oll veleien. An aotrou person a lare : « Gwech an amzer eo red d'ar veleien gouzañv ha mervel evid ar feiz ; o micher eo... » Souden e klevjom e-kreiz an noz eur hwitelladenn ; trouz treid a deuas beteg ennom, hag e-berr, an hini a oa o hedat el lanneg a deuas d'an daoulamm el lochenn :

— Arru eo ar re Hlaz ! emezañ. Tehet, aotrou person !

An oll a wiskas liou ar maro.

— Na dalêet ket, aotrou person ! eme an den-mañ ; emaint war on chouk raktal !

— Kenavo, ma mignoned, en eur ma hallin hoh adgweled c'hoaz ! eme ar beleg neuze. Et peb hini ahanoh war e du, ha ra vezo Doue ganeoh !

Lared a reas d'ar paotr a oa o klask mond d'ambroug anezañ :

— Diskouezet o hent d'ar re-mañ, Loeiz ; me en em denno ma-unan !

War-ze e kemeras e hent etrezeg al lanneg, hag e kolljom ar gwel anezañ en noz du.

Merhed ha paotred o-devoa en em dastumet en dro da Loeiz war an treujou.

— Kuit a drouz, eme hemañ, ha deut d'am heul penn-da-benn.

Darn a gerzas war e lerh ha darn a jomas.

— Deom en ti, eme ar boutaouer, ha na reom van ebéd anezo.

E oa peb hini o paouez kemer e skaon war an oaled, pa oe klevet tud o kerzed goustadig en dro d'al loj. Me a hursunas. Job e-nevoa tapet bouhal ar boutaouer, eur pez dir poumner ha lemm evel eun aotenn.

Ar boutaouer a daole koad en tan.

— Tommom, kamaraded, emezañ, hag evom c'hoaz beb a vanne jistr a-raog en em zispartia.

Unan bennag a grogas n'oun ken gand pesort kont ; me ' oa ma zell war an nor o hortoz pegoulz e tigorje.

Souden e welis Job oh ober eur stokadenn ouz ar boutaouer hag o trei e zaoulagad etrezeg eur horn euz an ti. Darbet e oe din laoskad eur skrijadenn : eun dorn a welis o toullañ e-touez ar hoad hag ar plouz, d'unan da zelled, marvad, petra a dremene e-barz al lochenn.

— D'az yehed, Job ! eme ar boutaouer.

E oa o kas e skudell d'e henou, pa zigoras an nor war he hed. Pevar den, gand fuzuilhou ha sabrinier, he stankas krenn.

— Na fiñvet ket, eme unan, paotramant oh maro !

— Perag seurt gourdrouzou ? eme ar boutaouer. Piou oh-hu, ha petra a damallet dim ?

— Eur beleg a zo en ho touez, eme mestr ar zoudarded.

— Eur beleg ? eme ar boutaouer. Ha daoust piou ? Marieze eo te eo, Job ?

Ar boutaouer ne rê ket a wad fall. Me ' oa ma zellou war ar zoudarded ; taol a ris ma daoulagad ive war an toull er voger ; e-leh eun dorn, e welis beg eur fuzuilh ; peder, pemp beg fuzuilh a gontis evel-se bantet warnom euz a beb tu. Ar wirjone a rankan lared, krena a rê e-kichen an tan, gwasoh evid pa vijen bet er-mêz dindan ar skorn.

— Eur beleg a zo amañ ! eme mestr ar Hlazed.

— Hag hen dibri a rankan ! eme ar boutaouer.

— Peoh ! eme ar mestr gand eur vouez têt. Tremenet amañ dirakon, peb hini d'e dro... Kemer ar goulou ! a laras d'unan euz e dud.

Hemañ a dosteas d'an tan, hag a grogas er hi-lutig (1) a oa stag ouz post-kreiz al lochenn.

— Deut amañ, unan ! eme ar mestr.

Ar boutaouer a dosteas.

— Piou oh-hu ?

— Eur boutaouer-koad, en ho servij, mar karet !

Ar mestr a zizroas war-zu eun den bihan a oa a-dreg e gein.

— Gwir eo ? emezañ.

An den bihan a dosteas d'ar goulou. Ar boutaouer a reas eur souz a-dreñv, en eur leuskel :

— Judaz !

An den-ze a oa eul labourer euz ar barrouz, hag e-nevoa, evid eur yalhad arhant, diskuilhet ar person d'ar re Hlaz. Pebez sellou fall a oa en e benn ! Daoulagad an oll a oa warnañ ken lemm ha dir. Etre e zent, unan ahanom a laras :

— Fanch an Nostant ! Dalhom soñj, konsorted !

Fanch an Nostant a lare :

— N'eo ket hemañ eo !

Neuze e teuas beteg an oaled gand eun êr balh, hag e reas eur zell tro-war-dro.

— N'ema ket amañ ! emezañ. Me a ouie mad e vijem re ziwezad !

— Deom d'al lanneg, eme ar mestr... Daou zen amañ ouz toull an nor gand o fuzuilhou, ha tan gand neb a fiñvo ! Ni ne vefom ket a-bell.

D'an urz, daou a deuas da doull an nor, hag ar re all a yeas en-dro d'al lanneg.

Ma oa serret on genou, on diousskouarn a oa digor, hag e soñjem gand anken :

— Daoust ha kavet e vo ar person ?...

Abaoe eur pennad mad a amzer e oam evel-se, pa glevjom souden eun tenn hag eun hopadenn. Peb hini ahanom a reas eul lamm war e skaon, ha Job, o laoskad eur malloz, a zavas evel eul lubedenn, gand e vouhal en e zorn. Setu eñ en toull an nor.

An daou baotr a oa oh ober gward o-devoa dizroet, heb soñjal, o zell diwarnom, evid selaou a be tu e oa deut an trouz. N'halljont nemed en em daol ouz toull an nor da harz Job da dehed. Mes stourm ouz Job ne oa ket êz. Gand al lañs e-nevoa e tiskaras anezo o-daou a-hed-blad o horv : o fuzuilhou a gouezas diganto. Evid Job, ne rejom ken nemed klevet trouz e voutou o sklokal en eur vond d'an daoulamm etrezeg al lanneg.

oberour.)

(1) Ki (Leon = gwaskell) oe qui maintient la chandelle de résine. (Notenn an

Ganim e savas mesk. Ar boutaouer hag eun all a grogas war ar ganfarded, a-raog m'o-devoa gallet sevel ; tenna a rejom diganto o sabrinier ; me a dapas unan euz ar fuzuilhou ; eben ive ne oe ket ankoueet.

Ar boutaouer a laras neuze :

— Daou amañ, gard heb a zabrenn, da ziwall ar re-mañ ; ni, gand ar fuzuilhou hag ar benvieu a zo aze, a ya war-lerh Job !

Mond a reem, euz on gwella, war an tu on-devoa klevet an tenn. Mes souden eur sklêrijenn a baras en teñvalijenn an noz.

— An tan !

An tan a oa en eur wrahell lann. Raktal ar peder pe bemp all a grogas ive da flamma. Chomet e oam a-zav, hag e welem reiz mad darn euz ar zoudarded en dro dezo. Darn all a dostee ; o fuzuilhou ne oant ket ganto : pozet o-devoa anezo, marvad, da domma o daouarn, ken yen evel ma oa.

Ar person, avad, ne welem ket, na Job kennebeud.

— Marteze ema ar person en eur wrahell ! eme unan.

— Perag 'ta neuze o-deus tennet ? eme ar boutaouer.

— Tostom prim hag e welfom !

Me a jome bepred da zelled. Neuze e welis eun den o tond a-dreuz d'al lan-neg, primma m'halle, etrezeg ar zoudarded, hag eh anaveis an aotrou person. C'hoant am-mije bet da huchal warnañ.

— Sellet eta peleh 'h a ar person !...

Ar wech-mañ en em lakejom da haloupa, herra m'hallenn. Gweled a rejom anezañ oh arruoud e-touez ar re Hlaz hag o komz outo ; oll e teujont en dro dezañ.

Ni ' oa ive war arruoud. Savet e oa ganim an tarroz a yee d'al lanneg, hag e kerzem e-touez ar skodou, herr warnom evel war chas.

Mes eun all a dlee digouezoud en on raog. Job, e vouhal en e zorn, a zispakas ive euz e du. Peleh e oa chomet abace ? Marvad evelom ni hag evel ar person, e oa deut war wel euz an tan, goude beza kollet e hent. Lampad a rê a-dreuz d'al lann hag a-wechou dir ar vouhal a lugerne a-uz d'e benn, pa veze skoet gand sklêrijenn ar flamm.

Al lanneg a oa sklêr evel en de, gand e'hwel tantad o tevi war an dro.

Ni a dostee, gwella m'hallenn, dre guz, hag ar boutaouer a lavare :

— Mar galleme koueza heb goût dezo war o fuzuilhou !

Gweled a reem ar fuzuilhou, en o zav a-strollad, o lugerni gand sklêrijenn an tan.

— Doue !

Ar memez komz e-strinkas euz on genou. Job a oa kouezet war ar re Hlaz. C'hwel pe zeiz a dehas diwar e hent hag a dennas o sabrinier ; kement all a jome en dro d'ar habiten. War ar re-mañ Job en em daolas evel eur blei kounnaret. E vouhal a gouezas hag a zavas eun nebeud gwechou ; e zorn a oa prim ha têt evel eur huron. Klemmou ha malloziou en dro dezañ. Mes den ebed euz ar re a oa dirakañ ne glaske harz ouz ar vouhal dir, ken spontuz evel ma oa he zaol.

Ar re, avad, a oa dizroet rag Job, a addeue warnañ. Me en em lakeas da huchal :

— Dalh mad, Job, dalh mad !... Diwall 'dreg da gein !

Ar gomz-mañ a zoveteas e vuhe dezañ, rag seiz sabrenn a oa warnañ.

Ar re Hlaz a reas etrezeg ennem eur zell a goste, ha Job a zizroas warno, e vouhal ru gwad a-uz d'o 'fenn.

Dao !... Unan a gouezas.

Neuze e weljom ive ar person.

— En ano Doue, emezañ, na skoet ken !...

Mes Job, et er-mêz anezañ e-unan, ne rê van ebed ouz komzou.

Me ' oa ma zell war ar fuzuilhou. Ar re Hlaz, ive, daoust ma oa hanter gollet o 'fenn, a zante an dienez anezo. Piou ahanom a vije arru da genta ? Helebini a oa etrezom. Med skañvoh e oa ma zreid evid o re, daoust na oa den war ma

lerh. Eur vriad fuzuilhou a dapis hag a daolis en tan tosta : an tennou raktal da strakal gand ar flamm. Eun torkad all a vane c'hoaz : mes n'hallis nemed diskar anezañ. Eur soudard a gouezas warnon, hag a darhaas ganin eun taol sabrenn war ma fenn. Ruilhal a ris war lein ma hein, med en eur goueza, e welis bouhal Job o lufra, hag e klevis mouez ar boutaouer o hopal :

— Paouezet, paotred, chomet, ha ne vo grêt droug ebed deoh !

Pa dizroas buhe ennon, Job a oa eno. E zremm a oa drouglivet hag e zaouarn a grene :

— N'out ket bet tizet, Job ? emezon.

— Nann, emezañ gand eur vouez rust. Mes Per ar Gak hag a oa et da gâs ar merhed d'ar gêr a zo bet lazet.

Eun taol a skoas em halon.

— Neuze eo bet tapet ar merhed ive ?

— Nann, emezañ. Per a oa dizroet war e giz, p'e-nevoa o lakêt war o hent. Kouezet eo bet etre daouarn ar re Hlaz. Pa on-devoa klevet an tenn euz al lochenn, e oant o laza anezañ. Ema e gorr aze.

En kichen, e oa korvou ar re Hlaz.

En dro dezo e oa dastume on mignoned, hag ar re Hlaz kemeret el lanneg a oa eno ive.

Tri den a deuas en ti.

— Prest eo an toull ! emezo.

An toull ?... E oad o vond da vezia ar horvou maro. Ar re Hlaz a gemeras daou ha daou unan euz o honsorted lazet ; ar horvou all a oe douget gand ar boutaouer hag on mignoned. Ar person a gemeras ar penn a-raog, ha pa oa an de o farza, an nor a zigoras, hag an interrnamant a yeas er-mêz al lochenn. Ar person a lavare an *De Profundis* a vouez uhel, heb kana ; eur vouez all bennag a responte.

An interrnamant n'ee ket a-bell. Evid kaoud eun toull primmoh da lakad seiz pe eiz korv, e oa bet soñjet c'hoaz ar waz ha dizrei an dour el leh dounna anezi.

An dougerien a dosteas, hag euskennjont kichen ha kichen ar horvou maro. An aotrou person a laras neuze eur bedenn diweza, ha goude, o sevel en e zav, e troas war-du an dougerien, koueriaded ha dispaherien, a oa en o zav ive pe war o daoulin en-dro d'ar bez.

— Setu amañ, emezañ, labour an Droug-Spered e-touez an dud ; setu amañ labour an 'dud kri ha dizoue a zo o ren en Pariz en eur-mañ. N'eus nemed eur bla pe zaou, ar re a zo aze kousket maro a veve evel breudeur. Hirie int deut d'en em laza. N'eus nemed ar Maro a gement a halle ken o unani.

Nostant, emezañ, deus te da genta da anzav da dorfed amañ war ar bez, mar fell dit beza eun de pardonet !

— Ya, emezañ. Soudarded Hlaz, kroget ennon, hag am haset ganeoh d'ar prizon, ha laret eno eh eo me a zo kirieg da gement fall a zo c'hoarvezet. Me a vo dibennet, mes an dud onest-mañ a vo lezet en peoh.

Den ne oe trubuilhet abalamour d'an nozvez-mañ. Nostant e-nevoa kemeret ar beh oll war e jouk, hag ar zoudarded o-devoa e damallet penn-da-benn. Dibennet e oe en Sant-Brieg. An nozvez war-lerh e varo, an aotrou person a laras eun overenn evid e ene en lochenn ar boutaouer, ha d'an overenn-ze hini ebed ne vankas euz tud an overenn hanternoz.

(Diwar eur gontadenn gand Dir-na-Dor.

Ene kaer Erwan ar Moal (DIR-NA-DOR)

gand henri poisson

Skrid galleg an aotrou H. Poisson a zo bet troet e Brezoneg gand an D^r Tricoire, sikouret gand eur paotr yaouank euz Ploumagoar, hag a anavez mad bro Dir-na-Dor hag e dt. E-giz-se e vo meulet ar skrivagner brudet gand brezoneg e gorn bro.

Dir-na-Dor e-neus kuiteet ahanom. Doue e-neus galvet e vevel — rag, bet eo mevel Doue, euz penn beteg penn all — goude eur vuhez leun a veritou. Bez' e vo kavet tud da veuli e labour politik (politik e-barz an tu mad) hag e zéskamant evel skrivagner a ra anezañ unan euz ar re wella. Evidon-me, am-mije c'hoant da lavared deoh pegen humbl e oa ar hris en-ze e-barz e barfeddègèz. E vuhez kuit a reproch (a rebech) a jomo eur skwér vad evidom toud. Beza humbl a zo eur vertuz ha n'eo ket gwall stank, memez e-mesk ar re a zo devot evid traou Breiz, eur vertuz kristen-rik, avad; hag ar Bleun-Brug a zo kontant da gavoud anezi e kalon unan euz e vemprou brudet.

Erwan Ar Moal e-neus bevet skoachet e-barz maner Kermabrouz (« an Ermit » a veze greet anezañ gand tud ar vro). Mar eo deuet er-mêz, eur wech bennaket, ne vije nemed evid labourad evid e vro goz. Ne glaske ket rodal, ne glaske ket an enoriou hag ar medalioù; ha ne oa ket an dra-ze, euz e berz, eur seurt ourgouilh gwisket fall, na tamm dispriz evid ar plijadurioù na hall ket an den tapoud. Nann. An dra-ze a oa santimant naturel — pe gentoh, sur-naturel — e éné kristen hag a ouie ne oa mann ebed dirag Doue.

Peogwir e kave ne oa nemed eur mevel dister, n'e-nije soñjet, gwech ebed, miroud an traou e-nevoa skrivet. Med, eürusamant, ez eus bet tud d'ober pez n'e-nevoa ket greet. E-barz e bres-levriou n'e-nevoa ket, evid lavared, miret mann ebed euz e labourioù. Ne dalvje ket ar boan klask eno ar rummad levriou « Kroaz ar Vretoned » peotramant « Breiz ». Ne jome ket gantañ levr ebed skrivet euz e zorn. Peogwir ne stage priz ebed euz e labour e-unan, n'e-nije ket soñjet e vije bet ar rummadou tud da zond evid kaoud plijadur o lenn e levriou. Eun toullad anezo a zo chomet kuit da veza echuet. Skriva a ree dre ma vèze ezomm evid Breiz.

Ar zentidigez a zo merh d'an humilite. Se a zo kaoz ne vo ket an den esto-net o weled ar vertuz-se éné he haerra, e-barz kalon Dir-na-Dor. Deiz e intera-mant, an Aotrou Chaloni Brochen e-nevoa diskouezet e oa bet eur skwér vad a zentidigez skianteg d'an Iliz. Dougen a ree an Iliz e-barz e galon: « sentire cum Ecclesia ». Se ne vire ket outañ da lavared pez a zoñje war an traou dia-sur (douetuz), pe da zivenn e zoñjou war an dra-mañ-dra. Mad e vo lenn al lizer e-nevoa skrivet d'an Aotrou Chaloni Leroy, abalamour d'ar boan e-nevoa bet evid embann e « Zivizou ». (Buhez an Aotrou Perrot, beleg; p. 77-78.)

Bet ez eus reprochet dezañ da veza re diouz tu ar veleien (« cléréalisme intransigent »). N'eo ket gwir. Ne oa ket dallet gand ar veleien. Med, senti a ree euz Skol an Iliz, pa veze bet komzet gand e Eskob pe gand Rom. Stum-met e oa da glask an traou reiz; ar resped hag ar zentidigez a blije kalz dezañ. E-barz fin e vuhez, e halle lavared, en eur ober goap anezañ e-unan: « Ha, pez zo gwasoh, an droug ne ra nemed kreski ».

An humilite-ze ne ree nemed brasaad ar peb gwella euz eur seurt dén plén ha dilorh. Hennez e-nevoa eur spered lemm ha sklér, hag ouzpenn eun dro e-barz e zah. Eur bern traou farsuz a vez kavet éné e beziou-c'hoari hag e gon-tadennou. E zéskadurez a oa astennet e-barz al lennegezh (littérature) hag ar filozofiezh. Sant Tomaz ne oa ket dizanavezet evitañ. Lennet e-nevoa e levriou, ha, marteze, e tleas d'an Doktor braz-se da veva gand peoh ar galon, pez zo beva didrouz e-kreiz an traou reizet mad.

Ar peoh — gwir gurunenn ar vuhez kristen — a zo bet miret gand Erwan Ar Moal, daoust d'an drougidigez, d'ar gwalleurioù ha d'ar hañvou a gouezas

warnañ e-pad e vuhez hir, hag a zistagas anezañ muioh-mui diouz ar bed-mañ. Ar vuhez a zo bet stard evitañ, pa vez komzet mad, ha leun a zakrifichou a beb seurt. An « Emgleo » a oa bet meret fall, hag ar voutik a oa eet gand ar haor; mouller « Breiz » a yeas kuit, eun devez, gand an arhant; kañvou poaniuz e-nevoa bet e-barz e familh; trouz a oa bet da gas anezañ d'ar prizon, e fin ar bloaz 1944 (ouzpenn deg vloaz ha tri-ugent e-nevoa), ha pa oar an dén, dre veza gwelet, peseurt e oa ar prizoniu-ze... Erfin, erru bouzar ha diminuet, e tléè beva er-mêz euz an dud. Koulskoude, beteg ar penn, e viras eun ene dizoursi, joatuz memez. Me am-mo soñj dalhmad euz an dégemer a reas din-me, e miz Eost 1955(goude ma oa bet embannet Buhez an Aotrou Perrot. E vadelez, e garantez, hag a zeblante strinkal er-mêz euz e zaoulagad, ne oant nemed an tu plijuz euz peoh e éné, eur peoh hag a ziskoach diouz e bennadou barzoniezh (poésie) diweza. Ar re-mañ a vo istimet evel ar re gaerra, e-giz ar hantik e-nevoa savet pa oa bet adgreet chapel Bodfo.

E vignoned, e miz Here 1955, o-devoa bet c'hoant da enori anezañ e kreiz eur fest familh, a oe greet e-barz chapel Bodfo, e leh e oa bet lavaret eun overenn evid trugarekaad an Aotrou Doue. Eno hoaz, e tiskouezas pegen humbl e oa. Dégemeret a reas a galon vad an enoriou a reas dezañ hanter-kant mignon bennag, deuet euz kement korn zo éné Breiz. Divenn a reas, avad, e vije greet brud ebed.

Pa vo bet erruet e-barz ar baradoz, da ziskuiza da vikén, e vo bet dégemeret mad, sur a-walh, gand ar Werhez Vari, e-nevoa Dir-na-Dor eun devosion vraz eviti, ha gand sent koz Breiz e-neus kanet éné e gantikou.

Repozi a ra e-barz bered vihan Koadout. Evel a lavare e-unan:

« Evel ar zulio gwechall
« Ema bremañ 'tal an iliz
« O respont d'ar bedenn beurbaduz. »



EN ENVOR...

An eurvad on-eus bet da lakaad an dorn war eun nebeud skridoù kouezet diouz pluenn an Ao. *Saig ar Go*, ha chomet diembann beteg-henn.

Laouen om ouz o lakaad amañ dirazoh.

Ar re varo a ya buan, a leverer. Ar pez, a hellom lavared eo, eun den evel an Ao *Saig ar Go* n'eo ket prest da veza ankounaheet gand ar wir Vretoned.

Rouez int, e gwirionez, an dud evelañ. Bet eo, evel an Ao. *Yann-Vari Perrot*, e vestr, eur Helt penn-kil-ha-troad, eur stourmer dispar evid Feiz ha Breiz.

E peleh ema ar barrez euz eskopti Kemper ha n'he-deus ket klevet e gomzou entanet?

Den kaer a gorv, kaerroh oa hoaz a spered hag a galon!

Ar re o-deus bet tro d'e anaoud a oar pebez mignon feal e oa, pegen dilorh e oa, pegen distag oa e galon diouz traou ar bed-mañ. Ne ouie ket lavared nann da zen. Ha n'eur ket eet beteg tamall dezañ beza re vad, ha dibreder zoken a-wechou?

Beleg breizad, anaoudeg euz ezommou e amzer, n'eus dienez ebed ha n'e-nefe klas-ket skoazella...

E varo ken kristen, ken hegarad, a vezo bet skeudenn e vuhez... Tremenet eo!

Ar zoñj anezañ, e skouerioù, e skridoù, a bado keld ha ma vo e Breiz brezoneg ha Feiz.

Introibo ad altare Dei

Fiziañs !

Deh e oe beleget. Hirio, 'harz an aoter
'pad e overn nevez e ped a greiz kalon
hag e soñj gand enkrez e rank, eñ, ken dister,
rei Doue d'ar hristen, ha d'ar peher pardon.

Euz goueled e galon e tiwan eur goulenn :
« Ra vezin, va Doue, dre bark an eneo
eul labourer ampart, eur mestr mad da gelenn
eun hader oh hada eost puilh 'vid an neñvou.

Beleg, kannad Jezuz, me a fell din bemdez
labourad va zachenn gand feiz ha karantez
pedi, kared, gouzañv, ober vad e peb giz. »

Evid ar wech kenta e lavaras goude :
« Tostaad a ran laouen ouz aoter an Doue
a lako da vleunia labour va yaouankiz.

Rann-galon.

Meur a vloavez a zo e labour da hada
med n'e wel koulskoude tamm eost mad da vedi,
an dreog milliget a ziwan d'e voug...
hag ema ar beleg war-nez fallgaloni.

Rannet 'vez e galon dalhmad gand ar glahar
pa zoñj en eneo kollet daoust d'e boaniou,
pa wel an dud ken stag ouz madou an douar,
prest zoken da hoapaad e wella kenteliou.

Med daoust ma kav pounner ar zamm war e ziskoaz,
e stourm hag e labour bepred koulz ha biskoaz :
e zevel eo poania, d'e zevel 'vanko ket...

Hag ar paour kêz beleg a lavar beb beure :
« Tostaad a ran laouen ouz aoter an Doue
a lako da vleunia va labour pa vo red... »

Levenez.

Dre ma wel er barrez kalz tud outañ sentuz,
ha dre ma wel dreist-oll o kreski eun eost mad,
kristenien kaloneg, bugaligoù doujuz.

Nann ! n'eo ket en aner eo e-neus bet hadet
gwella m'e-neus gallet e-pad meur a vloavez !
Gand mestr an ebestel an hadenn venniget
a zoug kant 'vid unan dre skoliou e barrez.

Ya, eüruz ar beleg war-dro fin e amzer
p'e-neus kerzet divrall war roudou ar Zalver ;
gedal 'hell ar maro dineh ha dianken !

Beb mintin e lavar, eurusoh 'ged eur roue :
« Tostaad a ran laouen ouz aoter an Doue
a lako war va 'fenn ar gaerra kurunenn ! »

Saig ar Gov.

anjelus

Titirin sklinton
eur hlohig mintin
a nije mitin
er beure lirin...

Mantellig skañv
eun nozvez hañv
roget ha drailhet
stlejet, troellet
gand birou lemm
an heol mintin
skeduz e zremm,
'n em led truilheg
en oabl glizenneg
ar beure lirin.

Uz d'ar méziou,
uz d'ar hêriou,
kloh an anjelus
a red
abred,
o hervel d'ar bedenn,
er maner, el lochenn,
peb kristen !

Teir gwech e-neus tintet klohig an overenn...
Hastit, kristenien fur, setu koulz ar bedenn !


En aberz kevrinuz
peurguzet er spesou,
ema erru Jezuz,
gand teñzor e hrasou.

Dereid, a Zalver, d'en em ginnig d'ho Tad,
skuilhit uz d'ar pehour eur berad euz ho kwad,
euz ar gwad a ruilhas, eur wech, war ar menez,
evid gounid d'an den gras eur vuhez nevez.

Hogen an den a beh...
Evid an den fallagr,
e tarz an deiz,
sav eta da zivreh,
gand kred da feiz,
beleg an osti sakr !...

Pa dav tint sklinton
ar hlohig mintin
e méziou Breiz,
e tarz an deiz,
Tad ken madelezuz,
sellit trugarezuz
ouz ar beleg amdin,
kannad ho Mab divin,
a stou gand preder
e-harz an aoter,
er beurevez lirin.

Saig ar Gov.



TOUR TELEVISION KASTELL-BRIANT, etré Roazon hag an Naoned. War lein an tour, daou « gorned », unan o tégemer ar gwagennoù o tond euz Roazon, egile o kas ar gwagennoù krefivaet d'an Naoned. Uhelder an tour : 75 metr.

Ar vugale-mañ, e traoñ an tour, — evel oll vugale an deiz hizio — a welo an television én he hresk. Int-i a vo kenta rum-mad an television.

eur pennad brezoneg éz

AN TELEVISION OH ERRUOD ER VRO

eun dra vad pe eun dra 'fall ?

Ar pennad skrid-mañ a zo éz da lenn. Fiziañs on-eus e hallo beza komprenet gand n'eus forz peseurt Breton o houzoud komz brezoneg. Lakit tud ar vro, en dro deoh, d'e lenn, ha skrivit deom ho soñjou. Bennoz Doue deoh.

Setu amañ skeudenn eun tour nevez-savet e kichen Kastell-Briant evid an television. Eun « tour-etré » an hini eo. Eun tour hag a zégemero ar gwagennoù (ondes) kaset gand tour Roazon, evid kas anezo d'an Naoned, goude beza kresket o nerz dezo. Re bell ema an Naoned diouz Roazon, ha setu perag ez eus bet savet eun tour etré an diou gêr-ze. Rag, gouzoud a rit, gwagennoù an television a vez kaset e-giz-se euz an eil tour d'egile, da dri-ugent kilometr bennag, beb tro. Hag arabad e vefe traoù evel menezioù, tier ha kemnt 'zo etré beg an daou dour. Euz beg unan euz an daou dour e tleer gweled beg an tour all. Ablamour da ze, an television, peogwir ema o tond euz Pariz, a erru e Breiz dre Roazon hag an Naoned.

Pa lennoh ar pennad-mañ, kaser-skeudennou Roazon (l'émetteur de Rennes) ha hini an Naoned a yelo en dro, sur a-walh. Dija, e Kastell-Briant, du-mañ, an dredanoùrien (an elektrisianed) a deu a-benn da zégemer mad a-walh ar skeudennou kaset gand Caen. Nemed ne vez ket resevet mad ar skeudennou beb gwech ganto. E-giz-se e kavont an tu da zeski o micher, avad. N'eus forz penaoz, a-benn bloaz pe zaou, Breiz a-bez a hallo tapoud ar pellskeudennou.

Eun dra vad, a lavaro lod euz an dud. Eun dra 'fall, a responent lod all. Me a gav din n'eus ijinadenn ebet a ve mad pe 'fall. Gand n'eus forz peseurt kavaden, avad, an dud fall a ra traoù 'fall, hag ar re vad a ra traoù mad. Setu aze ar wirionez.

Koulskoude, seul vuioh a draou a hall an dén ober gand eur gavadenn, seul vuioh a vad e hall ober, pe, ér hontrol, seul vuioh a zroug.

Ar pezh a gont eo ar pezh a vez diskouezet d'an dud, sklêr eo. Mad ! N'eus ket da gemer skwer war ar Stadoù Unanet euz an Amerik. Klevit mad. Ar gazetenn « Saturday Evening Post » he-deus embannet kement-mañ : e korv eur zizun hebkén, kaserien-skeudennou euz Los Angelès o-deus diskouezet 127 den laz, 101 muntr « didamall » (meurtres « excusables »), 95 « kidnappings », etc... Kement-se evid an dud vraz. Hag evid ar vugale ? E-pad eur zizun hebkén ive, hag evid ar U.S.A. a-bez, setu ar pezh a zo bet diskouezet, en abadennoù greet *evid ar vugale* : 295 torfed. Ya, tudou, tost da dri hant dén laz diskouezet *d'ar vugale* e korv eur zizun, gand television an Amerik ! (Diwar eun enklask a zo bet greet er bloavezh 1952 gand an U.N.E.S.C.O.)

Er Frañs, n'eo ket heñvel an traoù, a drugarez Doue. Perag ? Ablamour television ar Frañs n'eo ket bet lakeet etré daouarn paotred o klask gounid arhant diwar goust an dud a vez o selled ouz o skeudennou, evel ma vez kont gand an Amerikaned.

Evid ar pezh a zell ouz traoù Breiz, e kavjem ésoh na vije ket bet ar gouarnamant o ren an television. Muioh a 'frankiz on-nije bet evid sevel abadennoù breizad. A-dra-zur...

Koulskoude, pa welom petra a vez diskouezet d'an dud (braz ha bihan), en tu all d'ar Mor Atlanteg, e kavom fur ne deufe ket an television da goueza etré daouarn n'eus forz piou. O ! a lavarit marteze, ni, n'om ket heñvel ouz an Amerikaned ; gouzoud a rafem-ni dibab on skeudennou. Siwaz an neñv ! Petra a vez diskouezet d'an dud, gand journalioù braz Pariz, evid klask gwerza ar muia a heller ? Petra ? Gouzoud a-walh a rit : torfejou e-leiz : tud laz, tud oh en-em-laza, tud o laza, ha kement 'zo. Hag e kav deoh e vefed furroh ma teufe an television da veza renet gand an neb a garfe (pe a hallfe), evel evid ar journalioù ? Me a gav din e vefe ar hontrol, dres evel e-barz an Amerik. Rag, kalz ésoh eo sach a dud dre ar pellskeudennou, egéd dre ar hazetennou, zokén pa vez kalz fotoioù warno.

Pa vezer o selled ouz eun abaden delevizion, e vez diêz-braz mond kuit araog ar fin. An dud a vez boemet gand ar skramm (écran) bihan, dres evel ma vez dallet an touseg gand daoulagad an naer. Ha kement-se ne c'hoarvez ket nemed e-barz an Amerik. E-barz ar Frañs, diwar eun enklask euz an R.T.F., n'eus kén nemed daou dre gant (2%) euz an arvestierien (spectateurs) o kaoud nerz-kalon a-walh evid trei ar bouton araog ar fin, memez pa ne blij tamm ebet dezo ar pezh a welont. Pegen dister eo bolontez an den !

Kement-se a c'hoarvez, a lavaro lod, ablamour ma 'z eo ar pellskeudennou eun dra nevez-flamm. En Amerik, n'eo ket kén an television eun dra nevez, hag e c'hoarvez bepred kement-all, eno. Ken na vez aliez bugale hag a jom da zelled ouz ar skramm beteg hanternoz, gourvezet war al leurdi, pallennou (tapisou) dindanno. Paour kêz bugale !

Kement ha ken bihan ma vez tailhet an eurvezioù television gand gouarnamanchou zo. Hini Bro-Zaoz, da skwer. Du-hont, en tu all da Vor Breiz (d'ar Mañch), ar pellskeudennou n'eont ket en dro d'ar zul vintin, evid lezel an dud da vond d'an templou ha d'an ilizou. Abaden ebet, kennebeud, da vare aoza boued evid ar prejou.

Er Frañs, n'eo ket bet renket an traoù en eur zerhel kont euz kement-se. Klemmou a zav, avad. Setu pezh a vez skrivet da baotred an television : « N'am-eus ket amzer da zebri, eme unan, etré ho tiou abaden. Re hir eo an hini genta, ha red e vez debri prim-ha-prim, en eun netra, evid tapoud ar heleier dre skeudennou (journal télévisé), goude-ze. » Rag, evel ma 'm-eus lavaret deoh, an

darn vrasa euz an dud ne hallont ket kuitaad ar post. Ha setu perag e klevet egile o lavared, droug ennañ : « Ar re-ze o-deus lakeet ahanom da vond da gousket da hanternoz evid gweled disterachou, eur wech muioh ! »

N'eo ket souezuz e vefe klevet tud zo, o lavared : « Bikén ne brenin-me eur post televizion ». Kaer ho-po, avad, ar pellskeudennou a yelo gand o hent, hag an dud a ranko deski ober ganto, heb koll o yehed.



Stankaad a ra an degemerézed skeudennou (récepteurs). Hag e stankaont founnuz, dre ar bed a-bez. Setu ar sifrou :

U.S.A. — 1950 : eiz milion. — 1955 : 38 milion.

U.R.S.S. — 1955 : eur milion e penn kenta ar bloaz ; ouzpenn daou vilion a-barz fin ar bloaz.

Bro-Hall (Frañs). — Araog 1950 : pemp mil dégemérez. 1954 : kant mil. 1955 : ouzpenn 400.000.

Bro-Alamagn. — 1955 : e penn kenta ar bloaz : 100.000 ; da geñver fin ar bloaz : pevar hant mil, pe dost. (E-giz ar Frañs.)

Japon. — Netra e 1953. — 1955 : 35.000 e penn kenta ar bloaz ha 250.000 a-barz fin ar bloaz.

Bro-Itali. — 1955 : ouzpenn pevar-ugent mil. — Bremañ, ouzpenn daou hant mil.

A-benn eun nebeud bloaveziou e vo erruet an televizion e peb ti, koulz lavared.



Ha petra a c'hoarvezo, neuze ? Eun nerz spontuz e vo an televizion etré daouarn ar re a raio ganti. Ken na vo bravoh, evid kas eur vro endro, beza o ren an televizion eged beza o ren ar gouarnamant, moarvad !

Beza 'z eus profeted hag a lavar, dija : « Neuze, ne vo ket lennet kén. An dud ne zeskint ket lenn, zokén. Lazet e vo al levr, ar c'hoariva (an teatr), ar sinema, etc... »

Pell re abred eo evid gouzoud petra a c'hoarvezo just-ha-just.

Pa oa bet ijinet ar sinema, lod euz an dud a lavare e vije kollet an teatr. Hag ar c'hoariva a zo yac'hoh eged biskoaz. Pa oa bet ijinet ar foto, tud o-doa lavaret, ive : « Echu eo gand al livouriez (peinture). » Hag al livouriez a zo eet gand heh hent, daoust d'ar foto. Pe gentoh, al livourien o-deus dizolôet heñchou nevez-flamm, bennoz d'ar foto. Pa oa bet ijinet an diskou hag ar radio, lod a zoñje e vije bet goullonderet ganto ar zaliou kofsertou. Ar hontrol eo a zo dégouezet. Muioh a dud a ya d'ar hoñserioù, peogwir ez eus, bennoz d'ar radio ha d'an diskou, muioh a dud o vourra gand ar muzik.

Daoust hag-eñ ne c'hoarvezo ket kement-all gand an televizion ? Ar pezh zo sur, e-barz ar Stadou Unanet euz an Amerik, hervez sekretourien al levr diou (bibliotekou), e kresk an dud o klask lenn, abaoe an televizion. Levriou gouiziegezh (science) ha levriou beaj eo a vez goullennet, dreist oll.



Hag e keñver ar relijion, petra a c'hoarvezo. Klevet a ran, diouztu, hini pe hini o respont « An televizion ? Eur benveg muioh, etre daouarn an diaoul, ha netra kén. » Ar re a lavar seurt traou a zo heñvel a-walh ouz an ebestel a oa o krena gand ar spont, e-barz ar vag, pa oa Jezuz kousket, e kreiz ar barrad amzer 'fall. « Perag e krenit ?... » E-barz an Amerik e kresk an dud a ya d'an ilizou, abaoe eun nebeud bloaveziou zo. Hag an amerikaned a gav dezo eo an televizion an hini a zo kaoz.

Med ar brezoneg a vo kollet da vad en taol-mañ, a zoñj bretoned zo. Ar galleg, harpet gand ar skeudennou, a vougo ar brezoneg buannoh eged biskoaz. Rag, ar brezoneg, c'hwi oar, daoust dezañ beza bet dégemeret gand ar radio (eun tammig, da vihan), ne vo ket dégemeret gand an televizion, war a lavarer.

Ha neuze ? Ha neuze, n'eo ket fallgaloni eo. Labourad, ne lavaran ket. Ya, labourad, ha labourad tenn. Labourad peb hini hervez e halloud, heb ober fê, gwech ebed, war labour ar re all. Ar re a labour war dachenn ar yéz (al lañgach), ne dléont ket disprizoud ar re a labour war dachenn an dañsou lakom, o lavared e reont « abadennoù meurlarjez » ha mann ebed kén. Er hontrol. Dre an dañsou, dre ar folklore, e hallo ar brezoneg mond d'an televizion. En-emzila a raio dre an nor vihan, da heul an dañserien, ma vez serret an nor-dal outañ. Piou a hallo herzel ?

Biskoaz ne vo bet klevet kement a vrezoneg gand kement a dud. Diskouez d'ar Frañs a-bez pegén kaer eo dañsou ha sonioù ar vro, setu petra a hallo an televizion ober. Ha ne gav ket deoh e vo ar gwella tu da gaoud mignoned nevez evid Breiz, e-barz ar vro, ha pell diouz ar vro ? Ha ne gav ket deoh e savo lorch e kalon ar vretonek, koz ha yaouank, da heul ? Ha ne gav ket deoh e fello da vugale Vreiz klask deski sorioù kaer ar vro, hag, evid l'ana anezo mad, klask kompren anezo, da lavared eo, klask deski brezoneg ? ha — pa ne fello ket dezo koll lañs — klask astenn pinyidigezioù kulturel o bro, dañsou, kanaouennoù, yéz ha kement 'zo.

Sonjit mad e kement-se, bretoned. Ha beh d'al labour !

D^r J. Tricoire.



MIZ AN NEIZIOU

Miz Ebrel, miz an nevez amzer, miz al laboused o kana, eo ive miz an neizioù. Gwasa pezh a zo, al laboused bihan o deus enebourien euz ar re grisa en or bro : ar vugale.

N'eo ket souez gweled bugale o tineizia laboused bihan evid kaoud ar blijadur da gemered o viou ; bugale n'int ken. Ar pezh a zo mantrus, avad, eo gweled ar gerent o lezel o bugale da ober kement all, rak n'eus ket gwelloc'h mignoned d'al labourerien douar eged al laboused bihan.

Selaouit kentoh ar hentelioù-mañ a ro deom ar gevredigezh, bet savet evid divenn al laboused : eul laouenanig a zebr, e 24 eur, 90 % euz e bouez a amprevaned louz : eur bohruzig a zebr, e 24 eur, 54 % euz e bouez ; e 24 eur, 6 penglaouig a lonk etre 8 ha 9.000 vi balafenn (papillon).

Daou 'filip a gas d'o re vihan ouzpenn 4.000 preñv ar zizun. Eur hoad pin a 30 dervez arad a oa hanter zebret gand ar balafennou ; eur hant koukoul bennag a deuas er vro ha ne voent ket néhet evid lonka an oll amprevaned fall-ze ; konta a reer o devoa debret eun tri milion bennag anezo.

Ar gwenniled a lonk a bep seurt amprevaned bihan askellok pa vezont gwelet o hournijal, tu ha tu, a-zioh on tiez. Ar gaouenn hag an askell-grohen a zebr an amprevaned brasoh hag a ra brezel zoken d'al logod ha d'ar razed.

Setu aze ar wirionez. Ar gerent a lez eta o bugale da zineizia n'eus forz peseurt laboused, pa deu an nevez amzer, a zo kerent hag a lez o bugale da ober droug.

Eur wall droiad pesketerez

gand job seite

(Pemp e oant lohet eun dervez euz presbital Gwiseni evid mond da besketa : an Aotrou Marzin, person Gwiseni, an Ao. Uguen, kelenner d'ar mare-ze e skolach Saint Yves e Kemper, an Ao. Prigent, beleg yaouank euz ar bloaz-se, an Ao. Le Gall, abostoler hag an Ao. Salou, kloareg ; ar pevar-mañ a dremene o elhan-skol e Gwiseni, o 'farrez henidig. Setu amañ an darvoudou a hoarvezas ganto, bet kontet e galleg gand an Ao. Uguen, ha lakeet e brezoneg.)

En hent evid pesketa

D'an 3 a viz Eost 1905 oa deiz ar reverzi vras.

Pemp oam lohet euz presbital Gwiseni, gand ar soñj mond da jevreta, en deiz-se, war eun enezennig reier anvet Lok-Karreg, dirag beg-douar Neiz Vran e Kerlouan.

Tro vad a reom ha laouen om prest da zistrei. Wardro div eur eo goude kreisteiz : ar mor a zo staget da zevel eun eur 'zo, hag or bag a vranskell dija war an dour. Poent eo deom sach a or skasou, rag an avel, kreñv a-walh diouz ar mintin, a hwez bremañ evel dirollet.

An distro : an taol-amzer.

Diskenn a reom en or bag hag en eur lakaad on oll nerz e stagom da roeñvi evid gelloud gounid beg-douar Kerlouan. Pa zigouezom e-kreiz ar houzug-mor, netra da ober, n'hellom mui mond war-raog. An tarziou mor en em daol gand eun nerz spontuz dindan eun avel fuloret.

Deiz ar reverziou braz, goude ma vefe sioul an amzer hag ar mor, red an dour a zo err ennañ etre Lok-Karreg hag an douar. Hirio eo. spontuz : en on eneb on-eus an avel hag ar mor, treuzi n'hellom ket.

Gand aon na vefem sachet war-zu an donvor, e tistroom da Lok-Karreg. Seul vui ma sav ar mare, ar mor a ya e kounnar ; an tarziou a dremen bremañ, gwall hwezet o hein, hag or bag a zav hag a ziskenn, taolet ha dis'aolet euz eun tu d'egile, paour kêz bag a riskl da dougna he fri ouz ar herreg. Neuze Yann Salou ha me a lamm euz ar vag. Daou eor a zo ganeom : taolet int a beh tu d'ar vag evid he delher dres. Kerdin an daou eor a zo nevez flamm, hag ar vag, dalhet euz an daou du, a jom bremañ war blas, luskellet gand an dour.

Aon a zav ennom n'hellfe ket herzel pell ouz eur seurt barr-amzer, hag e pedom an tri all da lammad euz ar vag evid dond ganeom war ar herreg a zo harp ouzom ha n'int morse goloet gand ar mor. Gwelloh e kavont chom er vag ha gedal an noz, pa vo diskennet ar mor, evid esa treuzi.

Ar herdin a dorr.

An avel a ya atao war gresk, kreñfoh kreñfa. Eun taol amzer eo e-giz ma vez gwelet nebeud, hag er vro e talher soñj anezañ atao. An ed a oa c'hoaz war o zreid a oe pulluhet ; e meur a leh, ar greun a oe diframmet euz ar pennou ha, pa deuas goude ze glaoeier o lakaad da vragezi ar gwiniz kouezet war an douar, ar parkeier a oe glaz evel prajou.

On tri gamalad a jom ouspenn el leh m'eo staget ar vag. Gweled a reont neuze e peseurt stad ankeniuz emaint, rag n'hellont mui, abaoe pell 'zo, soñjal tostaad ouzom : ar mor a zo bremañ re zon evid gelloud diskenn ha re riskluz e-kichen ar reier. « Gand ma ne vezint ket sachet war-zu an donvor », emezom ni. Siwaz, setu ar pezh a zigouezas.

Ar vag, goudoret da genta gand ar reier, a uhella seul vui ma uhella ar mor, en eur rei krog muih mui d'an avel. Ar herdin, o tarazad ouz ar reier a zo er strad, a dorr war-dro peder eur, hag a-zindan nebeud amzer, ar vag a zo dibradet ha stlapet ouspenn hanter kant metr diouzom. Echu eo ganto !... Kollet int... Edom o vond d'o gweled o veuzi ! Koueza ! reom d'an daoulin war or roh evid pedi. « O va Doue, saveteit anezo !... Gwerhez Vari, sikourit anezo, diskouezit hirio he kalloud, arabad eo ez afent da veuzi ! Nann, n'hellit ket !... » Red e vefe bet din sevel va dorn evid rei dezo an absolvenn, med ken skoet oan war an taol, ma ne deuas ket ar soñj war va spered.

War tevenn Kerlouan, ne welom neined daou pe dri baotr o tiwall o zaout. Ha goude ma vefe bet aze pesketerien euz an dibab, n'o-dije ket gelllet dond war o zikour, dindan eur seurt amzer gand eur seurt mor. An tri-mañ n'hellent bremañ avad nemed konta warno o-unan ha war gras Doue.

Ar stourm a-eneb ar mor hag ar reier.

An Aotrou person ne gollas ket e benn evid se. Kregi a ra dioustu en eur roeñv hag a-laz-korv, gand e oll nerz, en eur bolevad, e stur ar vag e-kreiz ar reier a zav en dro dezañ hag a zo stank a-hed beg-douar Kerlouan. Bez' ez eus anezo kantehou, a zav o fri e-rez an dour, e-pad ouspenn daou gilometr euz ar bord. Warno ez eus en em gollet meur a vatimant, deuet d'o gaolia'a heb goud dezo, hag ar re oll a anavez ar horn mor-ze a oar pegen dañjeruz eo tremen dre ene pa vez gwall amzer.

Ar vag koulskoude ne dumpe ket. An Ao. Prigent hag an Ao. Le Gall a roeñve gwella ma hellent evid sikour o habiten a zalhe ar vag en he hent. An Ao. Gall a goll eur roeñv dioustu koulz lavared, med chom a ra gantañ eun all.

Pellaad a reont euz ar bord ha treuzi a hellont eur riboull dañjeruz : an Toull Meur. Dond a reont a-benn da dehou diwar ar herreg ha setu i bremañ en donvor, med goude peseurt poan ! An Aotrou person a zo e zaouarn goloet a voh bihan.

Ar govesion war ar mor.

Tebet diwar ar reier, emaint atao e riskl, rag an avel a zo pennfollet, gouest da ziskornia saout hag o bag a zo bihan ha skañv : pemp metr a hirder, a-veh. Koulskoude ar pezh gwasa a zo tremenet, hiviziken ez eus nebeutoh a riskl.

Neuze an Aotrou person, atao o polevad, a lavar d'an daou all : « Ni a zo o vond da genta da goves an eil d'egile ; en em bourchasit hog e roin deoh an absolvenn. » Dond a reont neuze an eil goude egile e-kichen o 'ferson, ha goude ze eñ e-unan a goves d'an Ao. Prigent : e absolven genta oa d'an Ao. Prigent rei.

Ha bremañ, en avañtur Doue ! Soñjal a reont e-pad eur pennad roeñvi evid esa tostaad ouz an douar. Med e pe leh douara ? N'eus porz-mor ebet a-hed an aod gouez-se. Ouspenn, skuiz maro int. Izel a reont o bag da vond gand an avel, en eur zelher anezi gand ar roeñv a-benn d'an tarziou gand aon e vefe tumpet. Etrezeg an hanternoz ez eont. Diwar or roh e heuliom anezo en dremmwel. Ar vag a zav war gribenn ar wagennoù, a ziskenn evid sevel adarre. Gweled a reom anezi beteg c'hweh eur diouz an noz, evel eur graonenn da genta, eur pik du goude ze, hag erfin e kollom ar gwel anezi, evel ma koller ar gwel euz eul labous o nijal diouzom en neñv.

(Da genderhel.)

Daou hant e oam

Dre bevar horn Bro-Hall pevar beleg ha tregont hag eun nebeudig all ous-penn a glask ober war-dro eneou ar Vretoned divroet, ar re-mañ demdost da bemp kant mil anezo, ma vefent kontet mad.

Siwaz ! tano ar falherien er prad, p'ema ken stank ar yeot da droha. C'hoaz. ma vefe tud a-walh a-dreñv evid lemma ar filhier ha derhel anezo en o neudenn vad.

Red eo bet eta klask sikour digand tud ar bed, ar Vretoned kaloneg o-unan. Ar re-mañ a houlenn beleien breton evid Pariz, an Havr-Nevez, kêr-Rouan, hag e kement korn euz on bro ma 'z eus ennañ das'umadennou Bretoned a garfe en em entent e soñj kas da benn eun tammig labour talvouduz evid o spered. N'o-deus ket kalz a gredenn en o nerz o-unan. Ha kaoud a ra dezo, ma n'ema ket ar beleg en o hichen, pe e penn a-raog pe e penn a-dreñv, ne vo greet nemed labour nul.

Ne laran ket n'eo ket eun dra vad en eun arme kaoud ofisourien. Med petra a raio ar re-mañ ma n'eus ket scoudarded ha soudarded dornet war o micher.

Brasa labour eun ofiser hag a wel sklêr dirazañ eo roi d'ar zoudarded an « tres » ha lakaad enno ar pleg mad.

Setu perag d'an deg a viz Meurz e kêr Bariz, en-dro d'ar Skol-Veur anvet Institut Katolik, penn-rener personed ar Vre'oned divroet dre bevar horn Bro-Hall e-neus sonet ar horn-boud da zastum an dud a galon. « N'ho-po den pe koulz lared, oa roet dezañ da gompren a-barz ma oa kroget gand e daol trompilh. Er-mêz euz o bro ar Vretoned a zo eet digourach, mad da glemm ha da gonta pemp ha nao evel ar Hallaoued all, hag echu tout, paour kêz tud reuzeudig ma 'z int a geid all 'zo ! »

Mar kar kredi ! Eun-daou hant a oa anezo hag euz ar vegenn. Ha gwelet o-deus an eil hag egile e oa c'hoaz, ya, e oa c'hoaz dienn war lêz treud o 'flanedenn griz ha ne oant ket kondaonet evid mad da zebri bara zeh beb tro ma stagfent gand eul labour talvouduz evid magadurez o eneou.

Eun eston braz eo bet kement-se evid meur a zen morgousket pe boazet re aliez da gila ha da dalma e-leh frapa war ar zugeil da gas ar harr war a-raog. Ha n'eo ket ar veleien o-deus trohet al labour en taol-mañ, nemed amzer draska eun tammig an douchenn e penn ar foet da lakaad an traoù da ziblas.

Klevet o-deus an deiz-se, diouz ar mintin, an deg a viz Meurz seiz hag hanter-kant, eun ijinour euz kos'ez Brest, *Per Laorañz* e ano, doktor koulz war ar brezoneg ha war ar galleg, o tibuna dirazo e neudenn gwevn, diwar-bouez ar garg e-neus peb kristen da ranna en-dro dezañ ar feiz hag ar sklêrijenn bet digand e dud evel ma tigemer eur hrouadur danvez a-ziwar-lerh e gerent. C'hoaz e ranker gouzoud pe aour pe arhant pe kouevr pe ploum pe staen ez eus euz ar madou-ze ha diwall mad d'o strana a-zehou hag a-gleiz evel ma ra ar 'foranerien hag ar pennou-skañv a had o greun a-hed an heñchou pe dre ar parkeier terien, ha netra ne zav war o lerh, tud sod ma 'z int.

Eur hristen, ne vern e pe leh na dirag piou, a dle diskouez e feiz hag ingala ar madou speredel. Hag perag n'henn rafe ket gand muioh a galon hag a levenez dirag tud e vro hag eo ken treud evito ar bevañs kristen dre heñchou an harlu. Arabad avad kana ar memez son ha war ar memez ton d'an eil ha d'egile. Red eo mond war bouezig gand ar re zo laosk ha dister o feiz hag eo ken êz o sponta pe distaga o brankenn hanter zeh euz gar gwezenn vraz an iliz. E-leh 'z eus c'hoaz dindan al ludu elfennou tan hag a vefe lakeet huan war elum en-dro, n'eo ket eun dra fall mond eun tammig startoh ha gand ma vefe komzet d'ar Vretoned-se eur parlant hag e vefe gantañ blaz ar vro. Anez da ze, amzer gollet. Pa ne gompren seurt an dud, ne dalv ket d'ar prezegour sevel e vouez ken uhel-ze.

An ijinour *Laorañz* a zo eun den e kreiz e vrud ha pasket e-neus boued d'an dud deuet eun tammig war an oad o-deus kavet ennañ blaz an hollen priziusa 'zo, hollen ar furnez.

An hini e-neus tolet war e lerh diouz an abardaez e 'fallh e prad ar sperejou a oa eun den yaouank savet e-mesk ar galleg ez-vihanig, eun tu bennag diouz kostez Gwened pe an Orient. Eñ eo an hini e-neus lakët en e zao, gand an *Aotrou Person Gautier* « Yaouankiz Breiz » en-dro d'ar Vreuriezh vraz anvet « Mission Bretonne » e kreiz kêr Bariz. Ne lavaras ket deom dre beleh mond evid tizoud ar pal hervez al lezenn. Nann, med konta a reas deom petra e-neus greet gand eur vandenrad paotred ha merhed yaouank e Pariz evid tos aad ouz ar pal-ze, ha petra ive o-dije karet ober, ma vije bet distanket abred a-walh an hent dirazo. Eur gentel vad eo bet evidom an dibunadenn euz an taoliou-esae greet gand ar yaouankizou kaloneg-se evid miroud ouz o hamaladed da vond da goll ha sevel ubel banniel ar feiz e-mesk ar Vretoned divroet.

Med d'an ofisourien eo heñcha labour ar zoudarded. Dezo eo da gundui ar harr ha dezo eo mond e penn a-raog ar rejumant. Setu eta e-pad an overenn kreisteiz eur beleg a zavas e vouez da ziskouez penaoz, e peb amzer war douar Breiz, tud a iliz zo bet kavet atao evid dougen a bouez breh samm pounner eneou ar Vretoned dare da vond da netra e-mesk pri ha bouilhenn ar skoasilli don hed ha hed hent herr ha poaniuz o istor hag o 'flanedenn war an douar.

Sant Erwan benniget hag a gomze brezoneg — Sant Visant Ferrer a Vro-Spagn ha na ouie nemed latin — An Tad Mikêl an Nobletz, desketa den a oa e Breiz en amzer-ze koulz e galleg hag e brezoneg — An den eüruz Juluan Maner, deuet euz bro-Roazon, e Kreiz-Uhel, eur « gallo », da brezeg da dud Breiz-Izel en o 'farlant o-unan — Hag an doktor entane!, Sant Loeiz-Vari Grignon a Vontfort — An oll a ro deom, dre o labour hag o donezon dispar, eun degn euz ar pezh a hell ober beleien Breiz-Uhel ha Breiz-Izel evid derhel splann war dal ar Vretoned sklêrijenn vuzuduz ar Feiz kristen.

Eun dra vad eo bet deom-ni klevet kement-se.

Med n'eo ket trawalh komz ha prezeg, dibuna ha tabuta, red eo ive pedi ha kaoud warnom ha war on labour dorn Doue. Hag amañ e teu soñj deom euz an tregont gwaz ha maouez a dostaas war dro kreisteiz ouz an daol zantel e-pad ma kane ar re all kantik dudiuz ar Baradoz. Ganto e gwirionez e oa an nerz veur.

Da echui e larin deoh eo bet piket ma halon gand ar hanaouennou a beb seurt distaget e-pad ar pred hag a-raog pegi gand al labour studi mintin hag abardaez. Ha piou ne zantas ket an dour o tond en e zaoulagad pa zavas eur beleg e vouez da gloza an abadenn war eun taol bomm têt ha nerzuz.

« Ar Vretoned a zo tud kaled ha kreñ,

« n'eus bro all ken kaloneg dindan an neñv ! »

Fanch Kerne.

« EMGLEO BREIZ »

a embann Penn-Oberou al Lennegezh Vrezoneg.

Dindan ar Wask :

" GEOTENN AR WERHEZ "

Da geñver XX^{ved} deiz-ha-bloaz maro JAKEZ RIOU, e lak « Emgleo Breiz » 2.000 skouerenn euz « GEOTENN AR WERHEZ » da zond er-mêz.

Eul leor 112 pajenn 350 lur
120 Skouerenn war baper kaer 500 lur

Goulenn diwar-vremañ « GEOTENN AR WERHEZ » digand

« EMGLEO BREIZ », B. P. 17, BREST

« GEOTENN AR WERHEZ » a zo moulllet gand aotre hegarad an Itron Riou.

ISTOR AR BLEUN-BRUG

E 1907 ar Bleun-Brug a gemer an hent, e-unan. E gammedou kenta a ray e Kleder, e maner Kergournadeh. Setu petra a lenned-er gazetenn *Ar Bobl* — 21 a viz Gwengolo 1907 :

« Gouel brezonek en Kergournadeh. Kleder. »

Diziu, 12 a viz Gwengolo, eo bet greet en kastell Kergournadeh, parrez Kleder, ar gouel anavezet en Leon war ano *Gouel ar Bleun Bruk*, hag a oa bet aozet evid an dro genta en kastell Keryann, parrez Sant Vouga, gand an abad Ian Perrot.

An teatr a oa bet zavet e harp deuz moger diabarz ar c'hastell koz. Var an 'u araok e lenner « Doue ha Breiz ». Al lien-ridoch a zo livet varnan iliz Kleder. Da 10 heur diouz ar mintin, an aotr. Thomas, adjoënt-maër Plougastel, en deuz great var al letoun dreg ar c'hastell, eur brezegenn d'an dud divar henn an assuransou eneb an tan. Komz en deuz great en eur brezonek skler ha freaz. Var e lerc'h an Aotrou Tremintin konsailler jeneral hag ar Guillou o deuz lavaret eur ger diskleriadurez hennag. Da greiz-deiz, ar iaouankiz en em zastum en sal vraz ar maner, lec'h zo bet aozet eur pred braz ; goude lein, e tostaër ouz an teatr, dirag pehini zo ouspenn 1000 a dud o c'headal.

Ar c'han « Sao Breiz-Izel » a zigor an abaden ; goude, an Aotr. Cardinal, person Sant Vouga ha rener Feiz a Breiz a zispak eur brezegenn c'houek a ia eon d'ar galon. Red eo, emezan, derhel da spered Breiz, en difenn hag adrei buhez d'ezan. Saludi a ra pennou uhel ar vro a zo deut da enori ar gouel dre o fregans (sic), hag aspedi a ra anezo da veza a du gant ar re a fell d'ezo, kousto pe gousto, miret d'hon c'horn douar he iez, he c'hiziu, he feiz hag he gwiskamanchou.

Echu d'an aotr. Cardinal da gaozeal, an aktourien a grog da zisplega ar pezh nevez « *Dragon Sant Paol* » savet gand an abad Perrot. Tri arvest a zo ennan. Ar sujed anezan a zo eun tammig henvel deuz « *Maro Sant Tremeur* » gand an abad Roudot, istor deraou ar gristeniez en Arvorik.

Entre an aktou kanaouennou a zo bet kanet, e'ouez pere « Son ar boutou koat » gand Ian ar C'harof deuz Sant Martin divar ar meaz.

Araok kloza, brankou bruk a zo bet lodennet etre arvestidi ar pezh.

Eur Baleer. »

Dister eo brezonek Taldir evel koulz lavaret peb tra skrivet gantan adalek ma krogas gand *Ar Bobl*.

Heb e gazetenn koulskoude ne vije ket bet gouezet pe'ra oa bet gouel 1907. Roll ar henstrivadegerien loreet a zo. Ped anezo a gendalhas gand lenn, skriva, kana e brezoneg ? War-dro 3000 selaouer a oa, hervez lod. « *Dragon Sant-Paol* » a zo meulet evel-henn : « Le drame le plus beau et le plus chrétien qu'on ait jusqu'ici écrit en langue bretonne. »

Feiz ha Breiz, miz Here, p. 221, a skrive : « Komz a vezo great diwar Bleun-Brug Kergournadeh ar miz a zeu. » Ar gomz a zo chomet a-istribilh. Kredi a helfed eta, d'an neb a skrivfe istor ar Bleun-Brug gand harp *Feiz ha Breiz* hebken, ne oa bet gouel ebed e 1907.

N'ez eus meneg ebed gand *Feiz ha Breiz* euz Bleun-Brug 1908.

Er hazetennou am-eus lennet oa bet Paotred Sant-Nouga o rei skoazell da gendalh an U.R.B. e Plougastel.

Diou wech o-doa c'hoariet : da zul 17 a viz Gwengolo, deiz pardon Sant Glaoda war leurenn ar chapel : « *Keriolet* » hag « *Ar C'hornandoned* » ; d'ar yaou, er skol libr : « *Dragon Sant Paol* ».

Da zul, goude an abadenn, e oe « La fête du souvenir ». « Des bouquets de bruyère sont distribués aux assistants. »

« Gouel ar Bleun-Bruk a zo bet er bloa-man kaeroc'h eged biskoaz » a lavar *Feiz ha Breiz*, p. 279, e 1909.

Meneg a zo euz eur c'hoari, tennadeg d'ar walenn (perche), eur hiz koz dare da vervel, redadeg mirhi-houarn. Er bloaz a zeu marteze e welim e Sant-Nouga redadeg kirri-nij, ar pezh avad a ve eur c'hoari nevez evidom-ni, da vihanha.

Al leurenn-c'hoari a zo savet e penn ar patronaj nevez savet e Kergrist. Paotred Lesneven a zisplegas « *Trubuilhou Biel al Liardou* » hag « *Ar Mevel laer gant e bôted* ».

Da viz C'hwevrer 1907, Paotred Sant-Nouga ha Paotred Gwikar a bede o mignoned hag o amezeien d'en em voda d'ar meurzh 9, e bourk Sant-Nouga, abalamour d'ar haoñv braz n'ema ennañ tudjentil Keryann, e-leh ober ar vodadeg eno evel ma veze greet er bloaveziou all..

Diou studiadenne a oe ha goude-ze Fest ar vaz ha Fest ar hodell. Daoust d'an amzer fall eur milierad tud hag ouspenn a heulias ar gouel... a leverer.

Setu ar gentel a oe tennet : « Da bep Breizad poania ha poania, kement ma vo abarz dek vloaz aman great eur plaz d'ar brezonek, da doniou ha da istor ar vro e kement skol a zo e Breiz-Izel ».

Boulha ' reas Y.-V. Perrot e gefridi en eur vond d'ar 7 a viz Eost da Lanurvan (St-Urbain). Eur brezegenn a reas eno diwar-benn ar brezoneg. Kenstrivadeg a oe etre bugale ar skolioù : 22 anezo, o bruched bleuniet gand brug, a gemeras perzh er honkourioù.

Prestig goude, ar hazetennou a vuelle ar gerioù : « *Gouel ar Bleun-Bruk*. — Les jeux floraux léonards auront lieu cette année sous la présidence du Comte de Mun dans le parc du château de Kergournadeh mis gracieusement à la disposition des Pôtres Sant-Nouga par M. le Comte de Guébriant, maire de St-Pol. — Concours. »

L. Lok.

goulennit raktal digand :

« **Fondation Culturelle Bretonne** »

Boîte Postale 17, Brest, C.C.P. 380.96 Rennes :

LEXIQUE BRETON-FRANÇAIS et FRANÇAIS-BRETON
(Stephan-Seite), 330 francs, franco.

L'ORTHOGRAPHE UNIVERSITAIRE de la LANGUE BRETONNE
(Falc'hun-Dujardin), 180 francs, franco.

KOMZOM, LENNOM, HA SKRIVOM BREZONEG
(D' Tricoire), 280 francs, franco.

MOJENNOU AR MOR (Pierre Helias)
éditions Jos Le Doare, 280 francs franco.

TENZOR AR BREZONEG BEO

Galv an ao. Perrot n'oa ket bet chomet tre heb respont. Kavet am eus seiz roll «gériou nebeud anavezet» embannet e «*Feiz ha Breiz*» :

Meurz-Ebrel 1941. An ao. Perrot, gériou dastumet e Skrignag.

Gwengolo-Here 1941. Kerlann, euz Sant Filbarz (S' Philibert) e Tregon (Tregunc), dastumet er barrez.

Genver-C'hwevrer 1942 : Y. Madec, bet person e Sant Segal, dastumet er barrez.

Meurz-Ebrel 1942 : Mab-Arzel, dastumet e Plouarzel.

Mae-Mezeven 1942 : an ao. Peron, person Sant Vig, dastumet lod er barrez, lod all en e vro hinidig, ar vro vigoudenn.

Meurz-Ebrel 1943. Adarre an ao. Peron.

Gwengolo-Here 1943. Ganin va-unan, dastumet e Skaer.

Ar gériou-ze a lakin ive em labour, dre ma tigouezo o zro, lizerenn dre lizerenn.

An neb a anavezfe rollou all bet embannet amañ hag ahont a vefe mad dezañ o digas din gand aotre an oberour evel just.

6. AI.

a) « *Dour al* » gand eun *a* hir. An dour a zav er puñsiou pe en eiennou goude glaoeier ar goañv.

« Kalz glao 'zo bet, med *n'eo ket deuet an dour-al hoaz*, » n'eo ket uheleet an dour er puñsiou. (Kleder.)

b) Setu eur ster all hag a zeu de deurel sklerijenn war hennez.

[F. F. Al (gand *a* hir) : an dour sall a zav a-nebeudou war gorre ar hig sall er helorn. — An dour sall a jom e strad ar helorn warlerh ar hig. (Ar Vourh-Wenn.)]

An dour-al a zav er puñsiou goude beza treuzet an douar evel an « *al* » er helorn.

c) Gonideg a skriv ive e-neus klevet ober *Hal* euz an *hili*, dour sall a zav war ar hig er helorn. Hal ive evid krañch. Marteze neuze e vefe dleet skriva *hal* evel ar gér halenn.

7. AII.

a) « *Ken aliez all (ha) ma vezan ouz e weled!* » Me hag a vez ken aliez : (moi qui vais si souvent !).

b) « *Me a vez bemdez ha va breur ken aliez all.* »

Ken aliez ha bemdez ive.

Gwelit ar hemm a zo e ster an daou « *ken aliez all-ze* ».

[F. F. a zigas din skoueriou all.]

« Hemañ ne jom ket en e zav, hag egile a zo *ken skuiz all*. »

« Va zad n'e-noa netra ha me a zo *ken paour all* (pe ken pinvidik all). »

« *Keid all a zo eo aet kuit* ma 'z eo ankounaheet gand an oll. »

« Na jom ket aze *keid ha keid all!* »]

c) « *War e gemend-all eo eet* » gwasoh eged biskoaz.

« Epad tri miz eo chomet heb eva ; bremañ eo *eet adarre war e gemend-all*. »

d) « *Kemend-all*, ar menez tra, ar memez pouez... eur wech hoaz.

Evet o banne gand daou waz en ostaliri : « *Lakit kemend-all deom* : »

« Deg sahad ludu am eus dija taolet er park-se, *daou gemend-all da vihanha*, pe *dri*, a rankin da lakaad hoaz. »

d) *Hag all* implijet warlerh ar gér pe ar frazenn a dalv evid « *ive, ive da heul* », e galleg « *y compris* ».

« Avalou-douar, *plusk hag all*, a vez roet d'ar moh. »

« Ar haz e-neus debret al logodenn, *krohen hag all*. »

Bremañ e weler awechou skriva « *hag all* » evid « *et cœtera* ». Ne gred ket din e vefe mad. N'am eus ket klevet brezonegerien a-vihanig oh ober an implij-se euz « *Hag all* ». Klevet am eus avad, evid « *et cœtera* » lavared « *ha kement zo* ». « Da eva ez eus bet avad : *gwin, chistr, bier... ha kement 'zo* » pe hoaz : « *... ha me oar me!* » pe « *etc...* » evel er yeziou all.

8. **Amzao (Emzao)** êz, spletuz, avantajuz. Ar gér-ze a vez implijet dreistoll en derez keverata (comparatif) pe en derez-uhel (superlatif) « *emzavoh eo labourad gand ar «brabant», «emzavoh benveg eo ar fath eged ar falz da droha foenn»*. »

Heñvel e Kallag (Kerne-Uhel) hag ivez en derez eeun. Pa weled unan bennag oh ober eul labour stard, e kinniged sikour dezan : « *Sikour t' eus ezomm?* — « *Ne meus ket, emzav on!* » Je m'en tire — j'y arrive.



GERIOU - KROAZ

M	E	R	H	E	D
A	Z	E		T	I
R			A	R	E
H	E	N	N	E	Z
A	L	I	A		
D			L	E	R

Diskoulm da gudenn an niverenn 98

A-BIën. — 1. N'eo ket joatiz. — 2. Eul loen bihan, peotramant eun dra implijet gand ar mañsoner. O lavared e-barz pe leh ema an traou. — 3. Peb den e-neus pevar. — 4. Liou. — 5. Pa vez kalz ez eo kontant ar peizant. Niverenn. — 6. En eul leh, e-barz eur plas na welan ket va-unan.

A-Zerz. — 1. An oll dud a ra se, asamblez gand an amzer. — 2. Loened kaseet gand an dud. — 3. N'eo ket uhel. — 4. D'ar skol e vez kaset ar vugale da zeski ober se. — 5. Ragano gour (pronom pers.). Niverenn. — 6. Ragano gour liez (pron. pers. plur.).

	1	2	3	4	5	6
1						
2						
3						
4						
5						
6						

KELEIER

ABADENNOU BREZONEG EN ITALI HAG E RADIO-VATIKAN

D'an 12 a viz Meurzh 1952 e varve an *Ao. Emil Cueff*, o lezel war e lersh teir merh, Annaig, Lenaig ha Marlion hag a zo eet e miz Meurzh tremenet d'ober asamblez gand o mamm eun droiad en Itali. N'eo ket ar wech kenta ma 'z eont d'an estrenvro da vruda kanaouennou Breiz. Bro Holland ha Bro Veljik o-deus bet dija an dro da glevet mouezlou or henvroadezed, gwella kannaded or soniou koz ha nevez. Ar bloaz-mañ, avad, on-eus bet ar chans da resev eul lizer hir o tanevella beaj ar hanerezed.

Kanet o-deus e Milano, Padova, Venezia, Naplez ha Rom. Ar gwella degemer a zo bet greet dezo e peb leh hag an abadennoù o-deus roet a zo bet klevet meur a wech war ar radio.

Evid echui ha kurunenna o beaj, an *Itron Cueff* hag he merhed o-deus bet an enor d'en em gavoud gand On Tad Santel ar Pab. O welad koefou dantelezet ar Breizadere, On Tad Santel e-neus lavaret : « Oh ! Votre chère Bretagne, je l'aime tant ; je vous bénis et je bénis la Bretagne ! »

Braz eo bet an enor greet d'ezo ha d'or bro. Braz eo ivez or plijadur o welad eur wech c'hoaz ar garantez tener e-neus Pi XII evidom. Kinnig a reom or gourhemennou d'an *Itron Cueff* ha d'he zeir merh evid an enor hag ar blijadur-ze a dleom d'o arz ha d'o bro-garantez.

ha c'hwi Bretoned, penaoz e lavarfeh... ?

(*Bleun-Brug*, niverenn 97.)

Respontou mad ha kenteliuz a zo deut beteg ennom. En niverenn a zeu e vint embannet. Nemed e karfe maoud kalz respontou nevez hoaz... Lavarit, mar plij, en eur respont, euz peseurt korn-bro ez oh.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG.

Abaoe an niverenn ziweza, Sekretour ar Bleun-Brug e-neus roet kaozeadennoù skeudennet er skoliou-mañ : *Languidic* (paotred), *Morb.* ; *Baod* (p.) ; *Santez-Anna-Wened* (kloerdi-bihan) ; *Dirinon* (merhed) ; *Likès, Kemper* ; *Kernouës* (m.) ; *Sant-Fregant* (m.) ; *Gwisenn* (p. ha m.) ; *Landivizio* (p. ha m.) ; *Lokournan-Leon* (p. ha m.) ; *Lesneven* (skol ar Galon-Zakr) ; *Ar Folgoed* (Juvénat, ha p. ha m.) ; *Landerne* (p.) ; *Lanniliz* (p. ha m.) ; *Lanarvily* (m.) ; *Plouvien* (p. ha m.) ; *Ar Vourc'h-Wenn* (p. ha m.) ; *Landeda* (p. ha m.) ; *Treglonou* (p. ha m.) ;

Ouspenn ar skoliou meneget beteg-henn, skol vrezoneg a vez greet c'hoaz er *Folgoed* (m.) ; *Dirinon* (m.) ; *Kernouës* (m.) ; *Sant-Fregant* (m.) ; *Ar Vourc'h-Wenn* (m.) ; *Skolach Lesneven*. — *Skolach Gwengamp*.

LES CAHIERS DU BLEUN-BRUG.

Kalz euz on lennerien o-deus resevet e miz C'hwevrer pe e miz Meurzh niverenn genta or hannadig galleg. Reseo a raint an eil niverenn anezañ war-eun-dro gand Bleun-Brug miz Mae. Ar houmanant da Vleun-Brug, avad, ne dalv ket evid « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Kemet Breton hag a gar e vro hag e yez a dle koumananti d'ar hannadig-se hag a vez lennet dija gand evez e meur a vro : mîstri-kelennerien euz Bro-Bortugal, Bro-Spagn, Bro-Alamagn ha Bro-Sued o-deus digaset deom a-benn bremañ o skodenn hag o meuleudiou. Hastit afo kas ho 200 lur da J. Cormerais, 13, rue Félibien, Nantes. C.C.P. 77.60 Rennes.

BLEUN-BRUG KERNE

D'ar 25 a viz Meurzh ez eus bet eur vodadenn e Lokronan, dindan renadur an *Ao. Deniel*, person, an *Ao. Nikolas*, mîr, hag an *Ao. Gourmelon*, aluzenner. An *D^r Philippe*, penn-rener, a zo bet mired da zond.

Lakêt eo bet sklêr, e-doug ar vodadenn, roll gouel ar Bleun-Brug, e Lokronan, d'an 2 a viz Even.

Bez' e vo *Bleun-Brug* ar pardonioù.

Digeri a raio d'ar *zadorn da noz*, deiz gouel *Sant Ronan*.

Da 21 h. 30 : *Kaniri-noz*, dindan ar porched, gand *strollad-kan* ha c'hoari G. Merdy euz Douarnenez.

Da 23 h. : Pedennou diouz an noz, en iliz : bennoz ar Zakramant ; prosesion ar goulou tantad sant Ronan ; goulouidigez an tour.

Da zul : azaleg 8 h. 30, kenstrivadegou e skol al leanezed.

Da 11 h. : Overenn-bréd, lavaret gand an *Ao. Chaloni Ar Ster*, is-rener ar skoliou kristen, ha prezeget gand an *Ao. Chaloni Coadou*, aluzenner ti ar Retred e Kemper. Lazou-kana skolachou *St Youenn* hag al *Likès, Kemper*, ha skolach *St-Loeiz Kastellin*, a roio ar hanou santel e-doug an overenn (240 kaner).

Da 14 h. 30, ouz torr ar Menez : *Koroll ha Kan* ha c'hoariva « pardonioù Breiz ».

Warlerh, prosesion ar pardonioù, ha bennoz ar Zakramant en iliz.

Peadra, neketa, da lakaad pab Breizad da dridal.

Bezit oll e Bleun-Brug Lokronan d'an 2 a viz Even. Deuit gand ho pugale hag o lakit da gonkouri.



BLEUN-BRUG LEON

D'ar 27 a viz Meurzh eo bet en em vodet, e *Lanniliz*, komite Bleun-Brug Leon, ha komite ar barrez, dindan renadur an *Ao. Ar Menn*, person, an *Dimezell A. Gerdrel* hag an *Ao. Pauchard*, penn-rener ar homite lokal.

Ar Breur *Visant Sette* a zigoras an abaden, en eur lavared eur gerig diwarbenn ar Bleun-Brug.

An *Ao. Louis Fave*, kure, a beurzavas goude ar homite parrez.

Jean Barz euz Gwisenn a roas eun dampskeud euz an abaden hoariva ema o sevel evid ar zul goude merenn, a vo taolennet enni Bro-Leon a-dreuz ar hantvejou.

Peur renket e oe goude roll ar gouel, a dle beza lidet d'an 13 ha d'ar 14 a viz Gouere.

D'ar *zadorn da noz*, da 21 h. : Kaniri zantel, en iliz, gand *Laz-Kana Landi* (Kannerien Bro-Leon). Bennoz ar zakramant ha pedennou diouz an noz 'tan artifis.

D'ar *zul*, Azaleg 8 h. 30, kenstrivadegou, e skol ar Frered.

Da 11 h., overenn-bréd, prezeget gand an *Ao. Chaloni Falc'hun*, kelenner e Skol-Veur Roazon.

Goude an overenn-bréd e vo douget eur vriad bleuniou brug war bez ar re varo er brezel.

Da 14 h. 30, e Maner ar *Roual*, dirag an Aber Benniget, *Koroll ha Kan* ha c'hoariva an Aberiou. Goude, prosesion vraz parrezioù Leon, ha bennoz ar Zakramant, en iliz.

Da 21 h. 30, c'hoariva brezoneg gand c'hoarierien *Lanniliz* ha kanerien *Plougrerne*.

Lanniliz, d'ar 14 a viz Gouere, a vo eur mor a gan. An oll Vretoned hag a zo c'hoaz gwad breizad dindan o ivinou, en em gavo e Lanniliz en deiz-se.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697



BLEUN-BRUG

Kenstrivadeg ar prezegèrèz, 30.000 lur a briziou

Setu amañ danvez ar **prezegèrèz evid 1957 :**

« **Muioh-mui ez a an dud diwar ar mêz. Perag ? Peseurt riskl a zo eno evid ar vro ? Penaoz mired ouz an droug-se d'en em astenn. »**

Digor eo ar genstrivadeg-mañ d'ar yaouankizou, **paotred ha merhed euz 17 vloaz da 25 vloaz.**

Réd eo deski ar brezegenn dindan eñvor, hag arabad e vo da houmañ beza hirroh eged c'hweh munut.

Peb hini en em brezanto, dirag ar jury, deiz BLEUN-BRUG e gorn-bro.

30.000 lur a briziou a zo da hounid. An Itron a ROHAN-CHABOT he-deus kinniget 20.000 lur. Bennoz Doue dezi en ano ar BLEUN-BRUG hag al loreidi.

Evel beb ploaz, e vezo adarre eur genstrivadeg **kan ha kontadennoù poblek**, digor d'an oll.

Evid ar vugale ez eus kenstrivadegou **lenn, kana, displega, tresa, ha skriva.**

Bez ' e heller goulenn diganeom **leorig ar henstrivadegou :**

« Ty-Carré, CHATEAULIN, Finistère ».

Ar BLEUN-BRUG a vo : **d'ar 26 a viz Mae e ROSTRENEN,
d'ar 2 a viz Even e LOKRONAN,
d'ar 15 a viz Gouere e LANNILIS.**

Lenn a reom war ar « Sentier » :

Collecte pour le Breton

La collecte pour la langue bretonne aura lieu, comme tous les ans, le jeudi de l'Ascension. Nous engageons maîtres et maîtresses à y faire participer leurs élèves par la vente d'insignes. L'argent recueilli servira à l'impression de livres, et à l'attribution de prix aux meilleurs élèves des cours de breton.